

Urzh an Erminig

Urzh an Erminig krouet e 1381 a zo unan eus koshañ urzhioù brezel hag enor en Europa.

E 1344 e krou Edouarzh III a Vro-Saoz urzh « Marc'hegerien Sant Jord », ha goude-se hini ar Gabestrell e 1348. Yann II, e Bro-C'hall a grou e 1351 Urzh ar Steredenn. E 1430, eo hini ar C'hreofñ aour gant Dug Bourgogn ha damc'houde hini ar Greskenn gant Reun Añjev e 1448.

Yann V, dug Breizh, en deus bet c'hoant dre sevel Urzh an Erminig da ziskouez pouez an dugiezh war an noblañs hag ar youl da vezañ unanet tro-dro dezhañ.

Degemeret e vez merc'hed ha partabled en Urzh. Ar varc'hegez kentañ eo Janed Navarra hag an eil eil Janed Albret, kontez Richmond hag e 1447 Izabel Skos, dugez Breizh.

Evel an holl urzhioù marc'hegiezh eo bet berzet Urzh an Erminig gant reveulzi bro-C'hall hag ar c'holier diwezhañ a oa war bez Yann IV e iliz-veur Naoned a zo bet distrujet.

Distro an Erminig

E 1972, ar senedour Georges Lombard a gemeras lec'h René Pleven e penn ar Celib hag evit trugarekaat anezhañ en anv Breizh a-bezh en deus bet ar soñj da adkemer enoradenn an dug Yann IV. Ar pal ne oa ke adsevel un « urzh » kozh met kentoc'h kaout un arouez hengounel bev.

Roet e voe ar c'holier da René Pleven d'an 29 a viz Gwengolo 1972.



E 1988 e kemeras Skol Uhel ar Vro plas ar CELIB evit trugarekaat tud – paotred ha merc'hed – o doa, dre o obererezh hag o engouestl, graet enor da Vreizh.

An Erminiged a-vremañ

E 1972 e Pondi
René PLEVEN †

E 1973 e Roma ha Roazhon
Gabriele PESCATORE

E 1973 e Roazhon
Jean MEVELLEC †

E 1988 e Roazhon
Vefa de BELLAING †
Pierre-Roland GIOT †
Polig MONJARRET †
Henri QUEFFELEC †

E 1989 e Naoned
Bernard de PARADES †
Marivon QUEMERE-JAOUEN †
Per DENEZ †
Louis LICHOU †

E 1990 en Alre
Charles LE GALL †
Chanig LE GALL †
E. LE SCANV (GLENMOR) †
Joseph MARTRAY †
Albert TREVIDIC †

E 1991 e Kemper
Georges LOMBARD †
Robert LEGRAND †
Pierre LAURENT †
Pierre-Jakez HELIAS †

E 1992 e Sant-Maloù
Michel PHILIPPONNEAU †
Ronan HUON †
Yvonne JEAN-HAFFEN †
Jordi PUJOL

E 1993 e Dinan
Leanez Anna-Vari ARZUR †
Herry CAOUISSIN †
Yann POILVET †
Jean TRICOIRE †

E 1994 e Gwened
Ivetig an DRED-KERVELLA †
Pierre LEMOINE
Yvonig GICQUEL †
Alan STIVELL

E 1995 e Gwenn
Jacques BRIARD †
Loeiz ROPARS †
Jean FREOUR †
Ivona MARTIN †
Lois KUTER

E 1996 e Pont 'n Abad
Pierre LE TREUT †
Rita MORGAN WILLIAMS
Joseph LEC'HVIEN †
André LAVANANT

E 1997 e Kintin
Jean-Jacques HENAFF
Jean L'HELGOUACH †
Dodik JEGOU
Raymond LEBOSSE †

E 1998 e Gwitreg
Goulc'han KERVELLA
Henri MAHO †
Pierre LOQUET
A. CORRE (N. ROZMOR) †

E 1999 e Naoned
Jean-Bernard VIGHETTI
Riwanon KERVELLA
Patrick MALRIEU
Denise DELOUCHE

E 2000 e Pondi
Tereza DESBORDES
Lena LOUARN
René VAUTIER †
Pierre-Yves LE RHUN

E 2001 e Landerne
Pierre TOULHOAT †
Rozenn MILIN
Breur Marc SIMON
Dan ar BRAZ

E 2002 e Lannuon
Henri LECUYER †
Yves ROCHER †
Michael JONES
Robert OMNES †

E 2003 e Sant-Maloù
Jean-Louis LATOUR
Gilles SERVAT
Angèle JACQ
René ABJEAN

E 2004 e Kastell-Briant
Albert POULAIN
Yannig BARON
Marie KERMAREC
Yann GOASDOUE
Pierre-Yves MOIGN †

E 2005 e Loktudi
Jean OLLIVRO
Ewa WALISZEWSKA
Pierre LE PADELLEC
Jean KERHERVE

E 2006 e Plañvour
Jean-Pierre VINCENT
Claudine MAZÉAS
Xavier LECLERCQ
Claude STERCKX

E 2007 e Sant-Brieg
Rhisart HINCKS
Martial PEZENNEC †
Job an IRIEN
François LE QUEMENER †

E 2008 e Roazhon
Roger ABJEAN †
Gweltaz ar FUR
Yvonne BREILLY-LE CALVEZ
Viviane HELIAS

E 2009 e Ankiniz
Jean-Christophe CASSARD †
Tugdual KALVEZ
Yann-Fanch KEMENER
Jean-Guy Le FLOC'H
Mona OZOUF

E 2010 en Oriant
Catherine LATOUR
Annaig RENAULT †
André CHEDEVILLE †
Donatien LAURENT

E 2011 e Kemper
Andrea ar GOUILH
Yann CHOUCQ
Joseph Le BIHAN
André POCHON

E 2012 e Gwengamp
Yves LAINE
Albert BOCHER †
Ivonig Le MERDY
Frères MORVAN

E 2013 e Sant-Nikolaz-an-Hent
Jean-Jacques MONNIER
Yves-Pascal CASTEL
Martial MÉNARD
Tangi LOUARN

E 2014 e Naoned
Philippe ABJEAN
N. et F. LE GARREC
Jacqueline LE GUEN
Erwan VALLERIE

E 2015 e Gwened
Philippe ARGOUARC'H
Patrick MARESCHAL
Yvon PALAMOUR
Eugène RIGUIDEL

Roll-devezh

ar Sadorn 19 a viz Gwengolo 2015

14 e : Degemer

14.30 e: **Arrebeuri livet e Breizh (XVIII-XIX^e)**
Prezegenn gant Yvon Palamour hag Andre ar Barzh
Komz a raio an daou enklasker eus ar studi o deus graet diwar-benn an arrebeuri kozh a gaver c'hoazh hirie an deiz; pegoulz int bet graet, an ober, pelec'h e vezont kavet... ar seurtoù koad implijet, an teknikoù ispisial (petra nevez gant ar gwad ejen?), ar stummoù...gant harp skeudennoù, studi profil ar moulladurioù, gwarnisadurioù war vetal, mentoù, tresadennoù gant ar bluenn pe an dour-livet evit diskouez stumm orin an arrebeuri.

16 e **Lid Koler an Erminig**

An danvezioù dibabet evit roidigezh an Erminig e 2015 a zo :
An darempredoù etrebroadel – Breizh er bed
Ar skiantoù hag an teknikoù
Ar sportoù
Mui un danvez dibabet gant rannoù Skol Uhel ar Vro

Enoret e vo :

Philippe Argouarc'h

(darempredoù etrekeltiek- Breizh er bed)

Patrick Mareschal

(danvez dieub)

Yvon Palamour

(skiantoù ha teknikoù)

Eugène Riguidel

(Sportoù)

Ha roet **Medalenn Skol Uhel ar Vro** da
Skol Vreizh ha Pierre-Yves le Rhun
evit douaroniezh Breizh lakaet war ar genrouedad

Sonerezh gant **Kanerion Pleüiner**

19 e : Koktel

Digor eo an abadenn d'an holl, evit bezañ sur da gaout plas eo fur reiñ e anv dre bostel, a-raok an 10 a viz Gwengolo, da :
postel@skoluhelarvro.bzh
pe skrivañ da Skol Uhel ar Vro,
Kastell an Erminig, 6 straed Dor Bostern, 56000 Gwened.

Tud enoret 2015



Patrick Mareschal (1939)

Difenner taer adunvaniezh Breizh eo Patrick Mareschal. Pa oa rener Arsellva ekonomikel ar C'hornôg eo bet oberiantre ha kemeret en deus perzh, e 1973, e krouidigezh ar gevredigezh B5 a zo deuet da vezañ ar c'hCUAB e 1981 (Poellgor evit unaniezh melestradurel Breizh). Dilezet en deus ar garg a brezidant pa 'z eo bet anvet da guzulier-kêr e Naoned e 1983. E 2001, hag eñ kuzulier-departamant el Liger Atlantel, eo deuet a-

benn da lakaat mouezhiañ, gant koulz lavarout an holl, ur mennad evit adunvaniezh Breizh.

E 2004 eo bet anvet Patrick Mareschal da brezidant ar C'huzul-Meur hag an dra kentañ en deus graet eo lakaat banniel Breizh war savadur an departamant etre an hini gall hag an hini european : sklaer e oa d'an holl e oa al Liger Atlantel e Breizh ha n'eus bet tamm stourm a-enep ebet a-berzh an dilennedi ha keodediz an departamant.

Diouzh e diviz e-unan en deus kuitaet Patrick Mareschal ar C'huzul-meur e 2011 met strakal a ra bepred ar Gwenn ha Du war ti an departamant.



Eugène Riguidel (1940)

Eugène Riguidel, Gouere 1940, marv evit Bro-C'hall e Mers el-Kebir. Miz Du 1940 : ganedigezh Eugène Riguidel e Aradon aloubet gant an Alamaned.

1941, distaget al Liger-Atlantel diouzh Breizh gant Pétain.

Ur vugaleaj eürus, leun a hunvre, ar Mor Bihan, tignoloù, pouleñvat, dichapadennoù. Ur c'hrennard war vor...

Karantez hag engouestl, kiriegezh. Dimeziñ, bugale, labourat e Pariz war ar sizhun, bageal e-pad an dibenn-sizhun hag e-pad ar vakañsoù.

1968 : prezegenn Rostand, keodedad ar bed evit dont er maez eus an nukleel.

Bageal gwashañ ma c'hell, kenstrivadegoù, beajoù, trec'hioù : 1971 - Kêr ar C'hab-Rio, 1974 - Redadeg digenvet an Aurore, 1979 - Kentañ e Redadeg treuzatlantel a-zaouioù gant Gilles Gahinet : ar vrud !

1981 : Kentañ e trede tennad tro ar bed (Whitebread) e bourzh ar Mor Bihan. 1985 : termen d'ar c'henstrivadegoù.

Stourmer oberiant a-enep an direizherioù, a-enep ar c'hreizennoù nukleel, an OGK, an orjal... A-du gant Breizh adunvanet, gant sevenadur Breizh hag ar brezhoneg, gant Diwan. Evit lorc'h pobl Vreizh a-enep ar c'holieroù.... Evit kolier an Erminig !



Philippe Argouarc'h (1949)

Bet eo bet Philippe Argouarc'h, e kerzh e yaouankiz, o kantreal amañ hag ahont, disuj e oa d'ar servij soudard, tapet gantañ arnodennoù war ar fizik en deus labourer en un arnodva e Skol-veur Stanford er Stadoù-Unanet. Bez e oa unan eus ar skipailh en deus

skignet al lec'hienn gantañ war ar rouedad en Amerika an Hanternoz. E 1997 e sav kevredigezh Bretoned California. Distro da Bariz e 2001 : webmestr evit International Herald Tribune.

E 2003 e tigor Agence Bretagne Presse, Ajañs kelaouiñ e Breizh. Merzhet en deus pegen fall e oa ar servijoù kelaouiñ er vro, pe vefent prevez pe ensavadurel, pa vez kaoz eus mad ar Vretoned. An ABP a zo un doare da gelaouiñ ha da lakaat war wel buan-tre ar c'heleier (3 000 gweladenn bemdez). Rener an embann eo Philippe Argouarc'h ha doujañ a ra d'ar frankiz bras an esteurel. Hervez ar pennadoù a vez lennet ar muiañ e renker o urzh, da lavarout eo plas ar pennadoù pennañ. An ABP a zo dizalc'h hep tamm skoazell arc'hant ebet.

E-pad 12 vloaz ez eus bet embannet 35 000 pennad, 30 000 skudenn ha kantadoù a videoioù war lec'hienn an ABP, ur binvidigezh dibar e-bed ar c'heleier, ul lec'h eskemm buhezek hag ul lec'h evit mirout danvez ha memor Breizh.



Yvon Palamour (1932)

Evel kalz a Vretoned harluet pell eus ar vro eo bet Yvon Palamour kizidikaet ouzh sevenadur Breizh. Ebenour a vicher (kentañ eus e rummad e skol Boule, Priz meur rannvroel ar Micherioù arz) en deus bet tro da vont war-dro ul lodenn eus hon glad. Yvon, dre e vicher en deus krouet arbeuri pe strolladoù pezhoù arbeuri nevez hag ivez adkempennet arbeuri hengounel. Kelennet en deus e

varregezh war an danvez-se e Breizh hag er C'hebek (Kreizenn rannvroel brudañ artizaned Breizh)

En tu-hont da se eo bet, e vuhez pad, buhezour ha roet en deus lañs ha brudet sevenadur Breizh (tremen a rae kalzig a dud e kelc'h Jabadao e Pariz, un toullad anezho o deus kemeret perzh e sevenadur Breizh goude-se). Graet en deus ivez telennoù ha pa 'z eo distro da Vreizh e 1967 en deus savet bagad Pleuwigner, aozet kenstrivadegoù sonerien daou-ha-daou, broudet ar sonerien da implijout ar biniou hag ar vombard e skulennoù na oant ket temperet, ezel eo ivez eus laz-kanañ « Paotred Pleuiner ».

Pa 'z eo aet war e leve, en deus, gant unan eus e stajidi kozh, Andre ar Barzh, studiet don an arbeuri poblel hengounel (irc'hier, presoù lin hanternoz Breizh, arbeuri unliv pe liesliv kreisteiz Breizh). An enklaskoù-se a zo dellezek da vezañ embannet.



Sadorn 19 a viz Gwengolo 2015

Palez an Arzoù
e Gwened

Prezegenn ha roidigezh
Kolier an Erminig



SKOL-UHEL AR VRO
INSTITUT CULTUREL
DE BRETAGNE